

(5)

Yan ha Janned,

Pe an differanç, etre an Amourouzien hac ar Priejou.

Canomp amourousted Janned,
 Canomp amourousted Yan;
 N'eus netra qer coant-ha Janned,
 N'eus netra qer bras ha Yan.

Yan a ra tout evit Janned,
 Ha Janned oll evit Yan;
 Yan a gar tout gant e Janned,
 Janned na gar mann hep Yan.

N'eus nemet chagrina Janned
 Evit lagat gouela Yan;
 Evit lagat c'hoarzin Janned,
 N'eus nemet amusi Yan.

(6)

Yan a brepar lein gant Janned,
 Janned zo tostic da Yan,
 Ha qement tria a douch Janned
 Qerqent zo lippet gant Yan.

Gant he dorm prop bepret Janned
 A garg e veren da Yan;
 Hac atao scudellie Janned
 A zo carguet gant he Yan.

Ha na ze da gousqet Janned,
 E za ive buan Yan;
 Yan na gousq qet tost da Janned,
 Na Janned e qever Yan.

Qerqent evit ma sav Janned,

364

E sav ive buan Yan;
Yan a glask bepret e Janned,
Ha Jannet bepret ~~ke~~ Yan.

Mar deo bep mestres ur Janned,
Ha heb amourous ur Yan,
Ar vreg zo bepret ur Janned,
Hac an ozac'h bepret Yan.

(7)

Yan zo demezet da Janned,
Janned a zo greg da Yan;
Yan na anavez mui Janned,
Ha Janned a zigant Yan.

Gement tra zeu deus a Janned
Zo sur da zisplich da Yan;
Pa glêvot o c'hoarzin Janned,
E clêvot sur gouela Yan.

Ar frico a blich da Janned
A zao e galon da Yan,
hac ar gouele ma cousq Janned
N'en deo qen mui quele Yan.

Yan n'el mui beva gant Janned,
Janned en em varv gant Yan;
Yan gant Doue a garfe Janned,
Janned d'an diaoul a ro Yan.

(8)

An dervez ma varvo Janned
A verzo dervez caer Yan;
ha na velot dansal Janned
Nemet var bez ar paour Yan.

A. L. M. L.

(Vol. IV, p. 5-8.)
13 str. numérotées.